

(284) *Connouey anter-tro,
Var sujet al Liberté, an Egalité hac ar Fraternité.*

Var ton Person Bispechic.

*M'ar plich gamêc'h e selaouet
Eur chanson neve composet,
Divar-bey ar mad-oberou,
Rouanes an nationou,
Triomp oll, a greis hor c'halon:
Vive, vive an Nation!*

*Quechal n'om boa evit partach,
Nemet mizer hag esclavach,
Ha quechal tirantët barbar
A rê deomp-ni calz a c'hlaç-har:
Dibennet eo bet ar Roue,
Gouneet on eus al Liberté.*

(285) *O Liberté qen agreabl!
C'houi zo eur prezant admirabl!
Bremân e zeo mestr peb-hini,
Mad pe fall d'ey em gundui,
Da larza tadou ha mamou:
Ar c'hrimou zo deut vertuziou.*

*Libr oc'h da zortial eus Franç,
Dou vont pell bro da glasq ho chang;
Mes var lister an emigreet
Souden, hoc'h hano vo doug'et:
Coll a refet hoc'h oll danvez,
Ha, mar distroit, ho puez.*

*Callout a rêt beva en peoc'h,
Gant ar madou apparchant deoc'h,
Qen na deui requizision*

*Da scanvât ho pourvizion;
Ha mar covit al Liberté,
(286) N'o po qeuz ebet d'o tanve.*

*Dre volonté ar Francisien,
E ve decretet o lezen;
Mes mar teryront chom er g'er,
E vint casset var ar frontier
Da sacrificia o buez
Evit souten ar fallentez.*

*Libr an oll religionou,
Doc'h ma lavar an decrejou;
Mes mar chomit d'ar feiz fidel,
E souffrot touz-manchou cruel,
Ha mar taper ho p'elejen,
E vezint dibennet souden.*

*N'ey deo get difennet reded,
Da glêvet Kudren o prezeg;
Diouz ar zarmoniou en deus grêt,
(287) E rencomp dreist peb tra caret
Ar Republik, ha goude-se,
Mar plich ganeomp-ni, hon Doue.*

A nevez (1) ar citoyenet.

(1) -- Le couplet est le dernier (n. 22),
mais d'après une indication de Lédan,
(à la suite du couplet 8): "le dernier couplet
doit être ici", je le rétablis à sa place.

226

Doueou o deus invantet
Liberte hag Egalite,
Hag oustey ar Fraternite;
N'eb ne zoublo en ho fresanç
Souden vo doug'ot o setanç.

Roit desomp-ni nery Daniel,
Gwir Doue, da chom deoc'h fidel;
Serret eo an oll iligou,
Pe distrujet gant an diaoulou.
O Liberte qen agreabl,
C'houi zo eur prezant admirabl.

Egalite, deoc'h va homach
A rentan gant calz a gourach;
Qen enoret, qen pinvidiq,
Ha qen eurus ha qen jurdic
Verzo an eil hag egile
Dre voyen an egalite.

Da arzeza trôn e buissanç
E zeo distrujet an noblanç,
Hag ar Marquis a Samasch
Zo bet casset da blanta col;
En plaç ar marquis discaret
Marquisien neve zo savet.

Perac an oll geraouq'es
Demeus a saon Marseilles?
Divar an teil en euy nosvez
Eus divoanet noblanç nevez;
An oll saon coz n'en de nebria
Evit gallout o difanqa.

O! ma c'halfent ressuscita
Hon tadou da zont er bed-ma,
En em gaffent gouell soiezet,
Pa deufent neuze da velet
Merc'hedigou ar pitouilles
Golset oll a danteles.

Guechal Gourc'hemenou Doue (289)
A laque ar zul bet eis-de;
Noblanç a vremen a gar mad
Celebri hep qen an Delad:
N'o devoa get a rochedou
Da kallout chench d'an oll zullyou.

Troc'h et o deus o bles e q'is
Ma voa guechal tud a ilis,
O diou-souarn dizoloet
A zisquel ezint azennet;
Coulz hag ho bles, o arc'hant zo ber,
N'allent mui caout perruqenner.

An demezellet qercoulz all,
Louet el laou ar speret fall,
O c'hroc'hen en noaz zo tallet
Evel er c'hori qig loenet;
Da qurzat al laou en o feñ,
E renqont caout eur beruqen. (290)

(288)
E plaç arc'hant eus bet paper,
Distolet a vern en pep qer;
Ar paper zo casset da goll,
Evit pinvidicat an oll;
Dre vertuz an egalite,
Qen paour an eil hag egile.

Ar fraternite a lavar
E zoc'h va breur, ezoc'h va c'hoar,
Hag e tlemp poqet gant joa
Memes d'hor bouveney crissa:
Perac, pa ra memes sarmon,
Distruji hor religion?

Houma assur a brezeg'e
Guelloc'h evit fraternite,
Pini, elc'h an union (291)
Laqa brezel en nation;
An amitie zo banisset

Eus a doues ar c'itoyanet.

Var ho pennou, var hon douaro
E zeus bremañ laget cargou;
Var butun poult hag andeuillen,
Ha var peb bléven diouz hor penn,
Prenestou ha chiminalou,
Pantantou, timbr ha barrierou.

Peléc'h eta m'an euvustet
A zo bet deomp-ni prometet?
En asamble national
Neus remet-tud direiz, tud fall;
Geg ne vo eno tud juridic,
Ne vero mad ar Republik.

(Vol. II, p. 284 - 292
le couplet 22, dernier de
la transcription de Lédan se
trouve à la page 292.)